

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 87. ( AN AMOUROUZ DIZARBENNET )

Me ne lavaran ger da zen o dei taridala ladari dara-  
Me vel va Meztrez em c'hichen. lla

Me vel va dous me vel va c'hoant odei, bis  
me vel va oll gountantamant

Me a ya da c'houzoud diounti o dei taridala  
plac'hik ha c'hui e aotre dimezi.

Grid pe ne rid n'am abuzid ked, bis odeitaridala  
mont gant eun all em euz sounjed.

Bizkoaz me n'oc'h abuziz nak e nep fesoun nak e nep  
gis, odei  
lavared em boa deoc'h franchamant frank eo ar bed  
klazkid ho c'hoant

Va meztrez krueel a galon livirid din pevid rezoun  
o dei etc.  
pevid rezoun pevid sujed ne hell ked ho kaloun va  
c'hared

Kared ar merc'hed hak eva re, o dei taridala ladira  
daralla  
choum divezad en ho kwele.

Kared a ran kared a rin o dei  
Kared atao a avanturin

Kared atao d'an avantur odeitaridala  
er poent benak e teui an heur

Me zo yaouank hak a gavo, o dei taridala  
avantur vad pa deui va zro.

vvvvvvvvvvvvvvvv